

GUERZ NEVEZ

Var eun ton nevez.

M'AM be aoualc'h a studi, a speret da rima,
Hac eur bluen em dorn, ha me prest da scrifa,
Me gomposte eur reglen ervez va santimant,
Va sujet un atretien entre daon den yaouanc.

Mes quent avanç davantach me c'houlen assistanç,
Eus ar sperejou caëra quent evit e c'hommanç,
Da rei lumier d'am speret pa meus occasion,
Da ober eur son nevez ervez va intantion.

Pa lerran eul levr bian zo en cayer va study,
Me a ga traou surprenabl hac a ra chagrin din,
Pa lenn. . . va flanden scrifet gand va mestres,
Eus va brassa plijadur me meus trididiguez.

Pa voan ebars em jardin em oll gontantamant,
Me remercas eur fleuren a voa yiê ha brillant,
Quent brillant e voa e deillon hac an eol ardent,
Pa deu dezant para ebars ar firmamant.

Ounnes zo eur fleuren eus a velonconi,
Antreet doum em c'halon ha diez da effaci ;
Prinç an oll amourastet, roue an dud yaouanc,
E c'hundu dre e sellou d'am rentan languissant.

Quenta m'am boe an enor da velet va mestres,
E voa er porchet goude an oferen bred ;
An eil guec'h ma e guelis assuri a ellan,
E voa bars en ilis bet e communia.

O ober e lasq quenta e mesq ar vugale,
D'ar poent-ze e voa yaouanc ha me a voa ive ;
Aben eur pennat goude e his d'ar scol da Guengamp,
Hac hi er memes amzer a voa bars eur houant.

Ma tenis de zilezel va education,
Evit dont d'e antreteni eus a greis va c'halon,
Evit dont d'e antreteni Rouannes ar fleurjou,
Hac eus ar c'haëra fleur a zo er jardinou.

Ounnes a zo eur fleuren a velanconi,
Caeroc'h evit fourdelis nac ive romani,
Am eus dezi goenvi assuri a ellan,
E lacaï va c'halon vgr ar poent da rannan.

An eil de a vis eost me lacas em speret,
Hac ive em fantasi mont da velet merc het,
Mont da velet va mestres, Rouannes va c'halon,
Va oll desir er bed-mâ, va inclination.

Debonjour dec'h va mestres, an devez a hirie,
Gant eur galon gontant evel zo ganeme,
Couscoude pa en em sonjan e voa dia lavaret,
Ne ran nemet koll amzer o tonnet d'ho kuelec'h.

Sot oc'h sur, va servicher, ma teuit da gredi,
Ar goal deodou milliguet, zo o clasq hom separi ;
Ha pa vec'h din dispennet quer munut hag ar pell,
Se ne rafe ket din-me donet d'ho dilezel.

Pell so deus a amzer me am boa desirer,
E teujac'h d'am saludi evel va muia caret,

Ne larec'h guir ebet, ne rec'h quet a seblant,
Me 'm boa displijadur, mar e doe plac'h yaouanc.

Traitourez miliguet ! chenchit ho preposiou,
Rac disianç a rit din pa laravit ho comzou,
Rac disianç a rit din na glévan ho comzou,
Ebars cayer va studi demeus ho preposiou.

Eleal, va servicher, va c'hredi a ellet,
Rac me sinfe gand va goad ar pez a meus laret,
Delc'het d'am darempredi a bet fidel din-me,
Biquen na vemp separet an eil ous eguile.

Quen a deuo Doue d'ho guervel evit a vech diveza,
Da vonet da renta cont da Grouer ar bet-mâ,
Quen a deuo ar maro da finissa hor bue,
Biquen na vemp separet an eit ouz eguile.

Me meus guelet va-unan différanç diouzin.
Mari, Mari, va mestres, eus ho tarempredis,
Ho tud a zo puissant, o deus renç ha leve,
Me na meus quet a vadou, goud aoualc'h a rit-se.

Ouspen da guement-se zo emei va servicher,
Ar madou hag an arc'hant a eller da ober ;
Un den a vez demezet enep e santimant,
N'ell quet terri e gontrat evit aour nac arc'hant.

Quement zo var an douar gant va Doue crouet,
An oll aour, an oll arc'hant en eur pres destumet,
Hac e vent roet dime ne ven qet c'hoas contant,
Ma n'am be qet ar bonheur da possedi va c'hoant.

Me a meus groët eur boqet demeus a zivision,
Evit rei d'am mestrezic passetans d'e c'halon,
Hac a meus grêt anezan dimeus a huanad.
A lacaio d'en erren eur ruban eus va goad.

O tistrei eus ar pardon, ha var lein ar mene,
Un devez dreis ar re all hi laras din-me ;
Ma na guerit chanch a grontre pellât diouzin,
Ar goal deodou miliguet a glasq hor separi.

Ounnes eo ar bromesse o poa-hu dime grêt,
Diveza m'am boe an enor va mestres d'o cuelet,
C'houi a prometas dime hac ivet dre o le,
Na vimp qet separet evit deus ho coste.

Varben un neubeut goude int bet dispartiet,
An effet eus ho comzou a zo bet eprouvet :
N'eus netra var an douar m'el assuri ervat,
A sco un tol quen mortel evel eur goal deodat.

Pa voan ebars em guele nos gouel ar Rouane,
Me gléve un env em jardin hac e gane vié ;
Lavares a ré facil an anvic dre e son :
E ma da vuia caret en dosolation.

Deus ar mintin pa savis, me scrifas eul liser,
Da gaç d'au muia caret dre dorn eur messenger.
Da glévet e santimant evit ar vech diveza,
Guel eo mervel buan eguet chom da languissa.

Pa erruos ar messenger ebars ty va mestres,
E voe diguemoret mat evit e ziveza guech,
Qemer eure al lizer hac antren en e c'hambr,
Da scrifa din va c'honje neuze soudan vantant.

O setañç a c'houlennit emei va servicher,
Assuret oc'h d'e havet, ia, en bér amzer ;
Ma visac'h d'am santimant, mad ec'h ellit credi,
Na voa nemet ar maro capabl d'hon separi.

Mes na bremân na goude, emei, se zo certen,
An amzer din d'ho caret ne arruo biquen :
Amzer dêc'h d'am c'haout ne arruo biquen ;
Pa em boa bolontez, e voa dêc'h va goulen.

Me zo eur minor yaouanq e poursui va studi,
Pa am bezo er bloa-mân cals a velanconie,
Hac am bezo er bloa-mân eur galon glac'haret
Es' net bras a velet na en em garriemp qet

deni an nevez amvez a b'eun bars er spern gwen
E vo calon an dud yaouanq yiê ebars pep tachen,
Ar fleurou er jardinou a vo tout rejouisset.
Ha calon an dud yaouanq e pévar c'horn ar bed.

Mes me savo un dourel var lein ar mene,
Vis-a-vis d'a dy va mestres ha d'am hini ive,
Da vouela gant glac'har d'am amzer tremenet,
Da ober reflexion em planeden galet.

Pa voan-me deut ac'hane eur pennad eus e zy,
Ha me clevêt all lapouset er bot o fredonie ;
Ha me o chom d'o zelaout hac ive complaisant,
Rac ar chanson e ganent a voa sur ravissant ;

Cana a rent qer charmant, cana a rent qer yiê,
Rejouissa a rent calon tout qement a c'hlevé,
Ma commansjont lavaret dime ive dre o moes :
Petra dal dide, cloarec, qemer tristedigues ?

Petra ra did en em nec'hi er bed-mâ gant da chanç,
Danve madou zo certen ebars en abondañç,
Te so ebars er guer gant da vam ha da dad,
Ne c'heus nep necessite a voued nac a zillad,

Ha me a zo e cana ha yiê vo c'halon,
Ha neus er bed-mân nep provision,
Finissa res hep retard, neuze en un instant,
Ha rentet joaus bras, calon un den yaouanc.

Guechal m'em boa un amzer a sesolation ;
Mes brema me zo joaus, trionfant va c'halon ;
Ma a voar e gana brema certen ma mignonet,
Evel an ene a ve barnet da vont d'ar joaustet,


Var ben un neubent goude in bet en em gavet,
En eur plaç a goste o daou, elec'h m'e doa lavaret,
Da renta an eil d'eguile ar pez a voa dilect,
Ha da derri ar bromesse a voa etreze groêt.

De bonjour d'ec'h va mestres, emezan, prontamant,
Petra a zo a nevez en ho comportamant ?
Diveza ma ho cuelis e voa brillant ho sellou,
Ha brema n'ho remercan nemet o scuill daêlou.

Ha hi ho respont din, ia, en eur guir bér ;
Chui so quiriec d'am glac'har, emei, va servicher :
Retornet c'hoas eur vec'h dam c'haout, me so contant
Da resina va buez evit cavet va c'hoant,

C'hui certen, plac'h yaouanc, c'houi certen a so bet,
Ar c'henta, gouarneres imprimet em speret ;
Mes daêlou va daoulagad o vouela nos ha de,
O deus va oblijet da chench a volonte.

FIN.



GUERZ

Var eun ton meurbed trist.

TOSTAIT, calonou sensibl; silaouit gant silañç,
Ar recit eus va glac'har, trista experianç !
Ar Fortun en e c'holer, det eus an eureustet,
Ha dre mouvamant e rod e deveus va strinquet.

A ! tao eta calon baour ! izella da glemmou ;
Ro liberte d'am speret da zespeing e boaniou,
C'hui ivez va daoulagad, so en em disec'het ;
Va guinou n'ell mui comz, re oc'h eus-i trempet.

Brema leua a'chagrîn, ha va'c'horf ha va ene,
Abandonet a grenn d'ar brassa]calamite ;

C'hui va oll faculteou ha moderation,
Evit ma ellin guell prononç va affection.

O amzer a blijadur, te so ta tremenet !]
Consolation, esperañç, evidomp so colet !
Allas ! o sonjal rentout parfetoc'h ar boneur,
Hor bez bet troublet hor chanç, fabriqet hor maleur,

FIN.